

MARO ANN OTRO DANIEL

PERSON KARET LANN-HUON

O tud vad ker Lann-huon, chilouet, me ho ped,
 Daëro a zo em c'halon, kanan ne hallan ket ;
 Maro ec'h e hon ferson, ann Otro DANIEL,
 Eunn den oa meurbet gwiek, hag eur belek zantel.

Dre-holl e voar enn kanvo, dre-holl voar glac'haret,
 Pa glever ec'h eo maro hon zad muian-karet.
 Tri bloaz ha tregont-zo, oa e ker Lann-huon ;
 Er barouz e oa ganet e teuaz da berson.

Gand ann holl e oa karet a dost evel a bell ;
 Piou oa mignon ann Eskop ? Ann Otro DANIEL.
 Pet gwech eo bet diredet evid hen enori.
 Arruout a re bep gwech, ma tuet d'hen pidi.

Hon Eskop a wie skler oa eul labourer mad.
 Da daër heur euz ar beure, vije bemde war droad ;
 O kovez hag o kelen, oc'h ober aluzen.
 Ar paour, mar nije kalon, n'hen ankoeje biken.

Paëan re kalz a dier, ha diskin etajo ;
 D'ann holl a oa ezomek roe aluzenno.
 Rust a oa barz er gador, mes mad euz pep-unan ;
 Ha vit zikour ar pec'her oa didamant d'he boan.

Biken na vije klevet o komz euz den abet ;
 Dibonner oa he gomzo, karantezuz meurbet.
 Bepret e vije joauz, hano nn'holl a wie
 El lec'h ma oa tremenet, e Treger, e Kerne.

He zor oa bepret digor vid ann holl veleien,
Ha d'hen gwelet e teuent, a bep tu, a vanden.
A galon vad ho gwele o tont betek he di,
Ha bepret eur gir joauz nefoa vid pep hini.

Empad ar c'holera braz, hep aoun rag ar c'hlenvet,
E kichen ar c'hlanvourien, dalc'h mad vije kavet.
Ar *groaz a enor* neuze a oe d'ehan roet;
Den n'he deuz biskoaz muioc'h a dra zur meritet.

Pa vinigas ann Eskop hent houarn Lann-huon,
E c'hoantaaz a neve enori hon ferson.
Kroaz aour ar vikelet vraz a lak enn he gere'hen,
Dirag eur bobl niveruz a oa war ann dachen.

Ar groaz-se oa penn-herezh evid ar Bersonet,
Ann holl a lar trugare d'ann Eskop biniget.
Enor oa d'hon fastor, enor d'he vugale;
Kerzomp holl war he roujo bete fin hon bue.

Kammed vije dilabour; o lenn pe o pidi,
Gand eur memor evuruz buan helle diski.
Lizerio ken kaër zant Paul, hag ar skritur zantel
Oa moulet enn he speret, bete ma renk mervel.

Doue a zeu d'hen gervel; den na vezo ankoet.
Pedomp nin holl evit-han, enn amzer da zonet.
Karg ar beleg zo pounner; pedomp vid he ine,
Ma ielo da ziskuizan da Varadoz Doue.

Bea a voann he vignon aboue pell amzer-zo;
He ven-be m'oa kizellet pell arog he varo.
Breman e man er vered; prestik in d'he gichen.
D'ho pastor karantezuz, ha d'in rofet peden.

Amen.

Y. HERNOT.

MARO ANN OTRO AUGUSTIN D'AVID

ESKOP KARET ZANT-BRIEK HA TREGER

A boan ec'h e dizec'het daëro ma daoulagat,
E klevan ec'h eo maro, zivoaz ! hon Eskop mad.
Kanvo zo e Zant-Briek, kanvo e Lann-huon.
Ma c'halon a zo poaniet ; na neo ket hep rezon.

En hon zouez ugent vla-zo, digaset gant Doue
Noz ha de, e labouraz, didamant d'he vue.
Dre-holl enn he Eskopti ec'h e da labourad,
He zaouarn leun a c'hraso dre-holl a re ar vad.

Piou a hellfe niveri ar beajo neuz gret !
Hag he obero zantel, hep diskuizan kammet !
Eur galon aour a nefoa, komzo madelezuz,
Eunn Eskop meurbet gwiek, kalonnek, studiuiz.

Ar vretonet a garrie bete diskin ho iez ;
Gant-he ive oa karet, e ker vel war ar mez,
E Treger hag e Kerne, pep unan hen c'harrie,
Ha gant he holl vadelez ann holl a c'honee.

Pa gafe artizanet habil enn ho micher,
Eur vadelez ar vrassan a nefoa nn'ho c'hever.
Ho c'harga re a enor hag a bep madelez ;
Kavet eunn all evel-t-han, a gredan ve diez.

Enn he amzer zo zavet ilizo ha kroajo,
Kouancho ha tier skoll, leiz a bresbitario,
Ha dre-holl e vâa labour vid ann artizanet ;
Kredet, ann Eskop zantel gant-he a oa karet.

He ialc'h evel he galon a oa digor bepret ;
Ar paour a oa he vignon, hag ann emzivadet ;
Ar vugale a garrie, pep tra re evit-he,
Zellet skolach Landreger, hini Plougerneve.

Ar Frerien, ar Seurezet vije nerzet gant-han ;
Skolia mad hon bugale a reont hep skuizan,
Diskin d'he karet Doue, enori tad ha mamm ;
Ar vad dalc'hont da ober, hag hep diskuizan tamm.

Aluzenno kaër a gase d'hon zad, ar Pap zantel ;
Nao gwech ec'h ez d'hen gwelet, arog dont da vervel.
Ha kalz euz he Eskopti ac'h e ive gant-han ;
Hag hen klanv braz, ec'h eaz ar veaj diwean.

Hag a arc'hant dastumet evit Breuriez ar Fe !
Evuruz oa he galon, o welet kement-se,
O welet he Eskopti ebarz ar renk kentan,
Hag o c'honit ineo barz ar broio pellan.

Eur c'hlenvet hir ha poaniuz a bell-zo hen uze,
Kinnig ra gant joausdet he boanio da Zoue.
Mes he nerz zeu da vankout, ma koue didan ar zamm,
Ann holl a zo glac'haret ha karget a estlamm.

Pa erruaz ar c'helo oa marv ann Eskop mad,
Ann holl a oa glac'haret, daëro nn'ho daoulagat,
Hag a lavar nn'eur woela, pedomp vid he ine,
Ma ielo da ziskuizan da Varadoz Doue.

Eleiz ann hencho houarn a vern ver diredet,
Ha da bidi evit-han, rog ma vo douaret,
Enn Iliz Veur, er chapel honn Mamm, zantez Anna,
E laket he relego e peuc'h da ziskuiza.

Amen.

Y. HERNOT.